

## LENN E BREZHONEG (KLT/W)

1. Berr eo an tamm **koad**. [-OA- dist « oé/oè » e gwenedeg.](#)
2. Anna he deus lakaet un tamm sukr en he c'hafé.
3. **Piw** a gav mad ar **gwin gwenn-mañ** ?
4. N'on ket **skuizh gant** ar **brezhoneg**. [-ZH- dist. an h e gwenedeg ; \(ged = gant\).](#)
5. Achu eo ar **foar** a-c'houde diw **eurriad**. [eurriad = eurvezh.](#)
6. Italianeg n'eo **ket** ken diaez **evel**/hag an arabeg. [evel sanet “vel”, “el”.](#)
7. **Avaloù** glaz zo gant Yann. [-OÙ- dist « -ow » e gwenedeg.](#)
8. Red eo magañ ar vugale ha **debriñ**, ni ive. [-AÑ, -IÑ dist. « -agn » e gwenedeg.](#)
9. Me a yahe da **vakañsiñ** gant plijadur. [-HE e gwenedeg \(= -FE\).](#)
10. Ema ar soner **ion é**/o tostaad. [-ION \(e-lec'h -ien\). -ION a oa bet divizet implij e 1941 !](#)
11. E-menn e oa **kuzhet** Gwenole ? [menn = pelec'h ; e-menn = e-pelec'h.](#)
12. Ur **fari** braz en doa gwelet Yann **àr/war** an daolenn. [fari = fa\(z\)i.](#)
13. **Moned** a **ray** ma mamm da bourmen. [moned = mont ; ray = raio.](#)
14. Arabad **torriñ an uioù** a oa er yeinerez ! [an uioù = ar vioù.](#)
15. **Teñwel** eo an noz, ya, du-pod eo. [teñwel = teñwal.](#)
16. **Dait** da eved/evañ ur banne **arre** ! [da- = deu- ; arre = adarre.](#)
17. **Éc'h** ober petra ' **oc'h**/emaoc'h, ma zad ? [é = o ; éc'h = oc'h \(ober..\).](#)
18. **Dober/afer** 'm eus **ag** ur reolenn. [\(= e\(z\)omm 'm eus \*\*euz\*\* ur reolenn\).](#)
19. **Argant** oa **edan**/dindan ar **gadoer**. [argant = arc'hant ; kadoer = kador.](#)
20. **Boud eh eus** paper douzh ar **vagoer**. [boud eh eus = bez' ez eus ; magoer = moger.](#)
- 21.
22. **E-tal** ur wazh, ur wezh, e oa ur wezenn gozh. [e-tal = e-kichenn.](#)